



SKOL-HAÑV PROGRAMMOÙ AR RUMMADOÙ

Skrivañ filmoù
Sizhun 1 - 2025

GANT SOAZIG DANIELLOU (Kalanna)

Kompren dre studiañ filmoù hag en ur eskemm gant sevenourien, penaos skrivañ ur film. Labourat pep hini war e raktres gant sikour ar stummerez hag en ur eskemm gant ar stajidi all.

Pep stajiad a gaso a-raok fin Miz Even e vennozh film-faltazi pe teulfilm displeget en un nebeud linennoù.

PAL AR STAJ

Dont a-benn da ginnig e 5 munut (enrollet e video) en un doare sklaer, ur raktres film personel, teulfilm pe film faltazi, diwar ar mennozhioù degaset gant pep stajiad e penn kentañ ar staj.

DOARE DA LABOURAT

Diouzh ar mintin e vo labourer a-stroll ha daou-ha-daou war ur poent ispisial bemdez - An diazez, ar mennad-ren hag an doare istor, Aheloù ha pazennoù ar steuenn, Rouedad an tudennoù, Ar senennoù, Binviji ar skrivañ : Diverrañ, Synopsis, Kont din, Sekañser, Danevell, Senario.

- Goude merenn e vo skignet ur film e brezhoneg, kinniget ma 'z eus tu gant ur sevenour(ez) hag eskemmet warnañ. Tu vefe pediñ ar bloaz-mañ Dounia Bovet Wolteche, Mikael Baudu, Bleuenn Ar Born hag Avel Corre...

Labour hiniennel (pe daou-ha-daou) a vo goude war tem an devezh, pep hini o labourat war e raktres film gant sikour ar stummerez.

PET DEN ?

Ur strollad 8 pe 10 den a vefe mat. Prantadoù a-stroll a vo, prantadoù dre strollad (teulfilm / faltazi), prantadoù 2 ha 2 ha prantadoù labour hiniennel.

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù e-giz hemañ ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.

